

8 straed Hoche 35000 Roazon

12 lurs

bremañ


GENVER 1989 Niv. 88

DEUG BREZHONEK
DIOUZHTU !

BLOAVEZH MAT

MANIFESTADEG
EVIT AN HOLL
SADORN 4
A VIZ C'HWEVREZ
RENER NEVEZ
E RFBO

BREZHONEG
YEZH OFISIEL





Lennerien ger,

Klañv eo bet sekretourez BREMAN ken he deus paket dale an niverenn-mañ. Hon digarezit eta. Enem gavout a raio niverenn a zeu BREMAN a-benn 3 sizhun

Skipailh Bremañ

Respont da Jean Duchet

Pa laren "le chome Pobl d'aman an Emsav soket" ne gomen ket eus lec'h ar brezhoneg er strollad : ne raon nemet lavarout ne oa ket anavezet ne-meur e Breizh, e-koaz strolladoù all a ra un tamm mutoc'h a vevañ.

Pa laren eo ret "kenlabourat gant ar strolladoù politikel" ez en arda gant. Met n'eo ket ass : tri denves-kuzulier a oa war ar renk gant Pobl e Roazon, ha keloù ebet n'eo doa kaset da v-Bremañ, a zo d'arset e Roazon. Penaos bezañ anavezet evel-se ? Lar d'az "kararaded kas keloù hag e vint implijet."

Yann Leaskildri (Roazon)

Respont Paol ar Meur

Ne oa ket ma fal sevel ur pennad resis disar-benn mennadil ar gevredigezh Frankis Breizh, ur pennad berr disar-benn emvad diwezhañ hec'h izili ne lavaron ket. Dre lema an dek kinnig e tlefe d'am soñj dont anat d'an holl he faltioù pennañ-sevel ur geoded vreizhek emren, demokratel ha digor war ar Bed, aavezet ar brezhoneg-gou-nit evit an holl ar gair da vevañ, da labourat e Breizh. En Emsav politikel ez eus etregret F.B. o klask tishout ar patrioise. An doare da stourm eo a zo distañvel, un doare da stourm efedus en ur bed a zo speg em-nait enkadenn ar sentañ. Diñset o deus tud Frankis Breizh kreñnañ ar presegennoù didermen evit gellout ober rak diwanañ a ra ar gellout disar an ober ha n'eo ket disar an dibunadegoù pozioù.

Mignonad ker,

Kavout a reoc'h amañ, a-gevret gant al lisherig-mañ, ur chekenn 120 lur gall evit ma c'houmanant-bloas.

Tennañ a ran gouvid eus an degouezh-se a-benn ho trugarekaat a-gevra kalon eus ar sikour ho peus degaset din e-pad an daou bloavezh stourm an eus bebet amañ e Paris. Deut on a-benn da vevañ entitlet e brezhoneg a-benn ar fin.

Chañs vat da v-Bremañ ha kalon vat dreist-holl, labour a no war ar stern !

Serj Richard (Paris)
Kelemer war ar brezhoneg.

Kas a ran deoc'h va adkoumanant. Ar pezh a blij din ar mutañ : pennadoù Garan ar Meur, ar pennadoù disar-benn ar Breizh estren, ar c'heleier diwar-benn Breizh, ar gerioù-kroaz h.a.... E gairioù, pep tra a zo talvoudus !

A galon ganeoc'h.

Thierry Chatel (Saint-Albin)

Kas a ran deoc'h va skodenn evit adkoumanant da v-Bremañ. Dedennus tre e kavan ar gelaouenn met setu... feuket on me ivez.

Va zro eo bremañ da vevañ feuket gant ar re a blij dezho komanantit-digoumanantit abalamour d'ar pennad-mañ-r pennad embonet war he fajennoù ! Kizadik-epontus eo an aotrounez-se war a seblant.

Ne blij ket dezho e vefe komzet a-enep d'eo c'hredennou... paour kaezh tud ma z'int.

Poent eo dezho dihanit, a gav din. Echu eo an XIXvet kantved, pell 'zo.

Ur gelaouenn n'eo ket un iliz ! Greet eo gant tud a bep seurt, tud ar glet, tud a-nehou, ha goude e vironet ouz an dud da vont e-barzh ar sinemaioù ma vez diakouezet eno ar fiñskeur-demol na blijont ket dezho !

Eus peseurt tu e teu an dud strizh o mennoziou ? Lavarit din. Feuket int da gentañ, ha goude e vironet ouz an dud da vont e-barzh ar sinemaioù ma vez diakouezet eno ar fiñskeur-demol na blijont ket dezho !

Kendalc'h 'ta da skrivañ ar pezh a fell d'ho ken-skrivañerien skrivañ. Kouraj mat deoc'h ! ...ha bloavezh mat d'an holl a skriv hag a striv e brezhoneg hag evit ar brezhoneg.

Quellañ gouro'hemennou d'an holl skipailh.

Michel Paquis (Cheminon)
heul paj.12

PENNAD-STUR 1989

"Ar stourm a-enep dibardurioù ar gevredigezh a ment ha war savidigezh Europa!" Hemañ a zo mennozh-stur Pañch Mitt evit ar bloaz nevez. Setu ni laouenn...

Rak, just-awalc'h, e vezomp prederiet a-hed ar wech gant ur bochad dibardurioù a zo e-diabarzh ar Stad C'hall : an dibarder etre Paris ha "la Province", an dibarder etre ar C'horeg hag ar Brezhoneg, hag ivez, an dibarder etre ar yezhoù-se o-unan, lod o saout un DEUG, lod o chom di-ZEUG.

Poent lakaat par er c'hontou.

Lod ac'hanomp n'eo deus ket bet meizet c'hoazh talvoudegezh ar stourm evit an DEUG Brezhoneg a zo boulec'het da vat bremañ.


Gant an DEUG hon devo un heuliad klok a studioù uhel war ar Brezhoneg, evel ma'z eus unan evit holl yezhoù Europa. Ar re yaouankañ ac'hanomp, goude kuitaat al lise, a c'hellont mont rag-eun war ar studioù brezhonek ha, goude daou pe dri bloavezh, kavout fred en embregerezhioù a ra war-dro ar yezh pe war-dro ar sevenadur (embann, kelenn, skignañ), ganto en o godell un testeni ofisiel a ouiziegezh, seurt ma vez bremañ evit forzh pe vicher.

An neudenn eeunañ an hini wellañ...

Ur stourm evit Breizh eo stourm an DEUG ivez. Talvoudegezh ur vro a vez diouz talvoudegezh he studioù. Petore diplom a zo hiziv o klotañ gant personelezh Vreizh ? Hini ebet? Geo, unan a zo, nevez savet, goude ur stourm hir : ar C.A.P. Krampouezher !

Hemañ, evit ar mare, a zo an diplom ofisiel nemetañ a vreizhalezh...

Mennozh ar Stad eo, da vihanañ, Rak aze emañ an dalc'h ivez, amañ ez eus un dra ha n'eo ket reizh tamm ebet. An darn vrasañ eus ar postoù-labour krouet gant ar yezh a



DEUG ST BRIEG EVIT AN HOLL

4/02/1989

LOSTENNADOU-KIRRI 20 KM A-RAOK SAINT-BRIEG

- o tont eus Bro-Dreger : emgav 2e plasenn ar Vali-GWENGAMP
- o tont eus Bro-Roazon : emgav 2e dirak an ti gar-LAMBAOL
- o tont eus Bro-Kened : emgav 2e dirak ostaleri Le Magellan (parking) krouzhañt -LOUDIEG-

Gant ar c'hirri : Gouleier war enaou, klaksonioù a-bouez pennbannieloù war pep karr, pegsuniou,skritelloù ha c'hwezigoù ! Traktoù da skignañ e kâr.

Manifestadeg e Saint-Brieg : emgav da 3 eur stread Pierre de Goubertin, dirak Park ar Sportoù, evit an 3 lostennad-kirri. Echuñ a raio ar vanifestadeg dirak an Ensellerzh Akademi evit ober a-naoudegezh gant an enseller nevez anvet. ■

Aozet gant Unvaniezh ar Gelennerien Vrezhoneg gant skoazell Kenurzhierzh Sevenadurel Breizh.



taoed gant ar re-mañ ha pas gant ar re-se ?". An ton a oa bet klevet e Gwened, hen adklevet a reomp evit Saint-Brieg.

Kudenn-veur al "leadership" e-barzh an Emsav ! Ur gudenn ez eus daou zoare d'he diskoulmañ : bez e c'heller gortoz. Gortoz ken na teuo an den a blijo d'an holl hag a-ozzo manifestadegoù en ul lec'h a blijo d'an holl, gant amzer vray ouzhpenn (rak e Saint-Brieg -kazi sur- e vo yen).

Un diskoulm eo. Bez e c'heller kredañ ivez ez eo gwel Saint-Brieg eget

Neblec'h hag ar "re-mañ" eget Den Ebet. Neuze e rankomp sammañ al "leadership" war hon divskoaz, pep hini e damm. Evel-se en do Saint-Brieg. Evel-se en do pep hini ul labour resis : en em gas da Saint-Brieg. N'heller ket goulen nebeutoc'h. Un dra zo sur : n'eus ket ezhomm goulen mutoc'h. Ken ar 4 a viz C'hwevrer, e Saint-Brieg. ■ Paskal ar Marc'heg

R.f.B.O.

RENER NEVEZ

POLITIKEREZH NEVEZ ?



Daniel Hamelin ha Herve Desbois

Ur miz zo bremañ e oa bet staliet rener nevez RBO e Kemper. Herve Debois, breizhad, a zo un den eus an "ti" (15 bloaz e France Inter). Labouret en deus bet e Naoned evit keleier France Inter e-pad pell.

pemp bloaz ! Ret eo da RfBO en em glevet gant radioioù all ar roudad, mod all, daoust din bezañ breizhad ne tevin ket ken e Breizh !

Da biv e krede heman ober aon ? Herve Debois a'n em ginnig evel-mañ "Me blij din mont goustad, dirouetlañ kudem dre gudenn, arabat ober pep tra war un dro".

D'ar goulen "Petra soñjit eus an ditrohegesh brezhonag-gallez war ar radio ?" e res -pontas "ar goulen-se a zo pouezus ; ret eo kemer amser, (6 miz) da studiañ ar gudenn evit respont da interestoù ar radio hag ar selaouerien war un dro".

Un dra zo sur abaoe ur miz n'emañ e Kemper n'en deus ket graet trouz ar rener nevez ; marteze eo sin vat, gortoz gwel !

A.V.C.

WAR HO TEIZIATAER NEVEZ

MIZ EBREL 1989

13-14-15-16 - A VIZ EBREL 1989
GOUEL AR "RIGODAILLES" E ROAZON

28-29-30 A VIZ EBREL 1989
-GOUEL AR BREZHONEG - E KARAEZ-

DEVEZHIOU STUJ BREZHONEG

DISADORN 28 ha DISUL 29 a viz Genver e Sant-Malo a ozet gant Skol An Ensav (Pellgomz d'ar sekretourez evit enskrivañ 99-38.75.83.) holl liveoù (deraoudi da live an sotreegezh). Lojet ha maget a vo ar stajidi e Kastell La Briantais, e-kichen stankell ar Rañs.

Eus al LUN 3 a viz Ebrel betek ar GWEENER 7 (eiz sizhunvezh vakañsoù Pask) e Treglonou, evit skoldi, studieren (ha re all). Klask a reer kelennerien (bod ha boued digoust evito). Skrivañ da : François LOUIS -7, straed Jouanno - 56300 - PONDY.

2000-vez bloavezhad an Dis -pac'h Gall hag an Inizi" a vo danvez kendiviz Pariz, d'an 21 ha 22 a viz Genver a vo dalc'het e Skol Veur Pariz VIII (Jussieu), aozet gant FLNKS, UPLG, A Cuncolet hag UPC K0mz a ray Dominique Ghisoni (kenoberour al levr "Ces îles que l'on dit françaises") ha Suzanna Citron (oberourez "Le mythe national" a oa bet kinniget e-barzh Bremañ bloaz zo).



KAFEDI-TI KRAMPUEZH
abadennou-noz
A-BEP SEURT

Etre ROAZHON ha DINAN (ul lec'h plijus, degemer e brezhoneg, 25 mn eus Roazhon !!!)

GWIRIOU MAB DEN KELEIER

AR BREZHONEG HA GWIRIOU MAB-DEN

D'an 10 a viz Kerzu 1988, e Pariz, e oa d' lidañ 40-vez bloavezh Diskleriadur Bedel Gwirioù Mab-Den, ha, tostoc'h dimp, Ouest-France oc'h embann testenn an diskleriadur.

Deuet eo an embannadur-se e koulz da zegas da goun ar Vretoned ne vez ket doujet ar gwirioù-se en o bro ma seller a-dost ouzh ar skrid.

AR GWIR DA GOMZ BREZHONEG ?

Lenh a reer eta er mellad 2 eo gwarantet an holl wirioù meneget en Diskleriadur hep na ve da zerc'hel kont ouzh ar yezh. Hag hervez ar mellad 19, emañ ar gwir da soñjal hag an hini da gomz.

Koulskoude n'eus ket eus ar gwirioù-se gant ar Vrezhonegerien e lezioù-barn ar stad-c'hall, evel hon eus gallet gwelout pa oa bet barnet Herve ar Barzhig, ar stourmer eus SAB. Nag en o labour zoken, pa vez kaoz ar skarzhañ Serj Coglign eus ar Post goude e gondaonidigezh evit abegoù politikel (pe sevenadurel).

Ma'z afe kazetennerien OF da c'houlennata ar baotred-se diwar-benn Gwirioù Mab-Den o defe sur-mat traoù talvoudus da lavarout : met n'int ket Poloniz ar Jarulzavski pe Suafrikaned dindan botoù ar Botha, ha n'hall ket "Mammvro Gwirioù Mab Den" bezañ diskred warni en ur gasetenn ken feal ha leal d'ar stad jakobin.

AR GWIR DA ZIBAB AN DESKADUREZH

Er skrid-se c'hoazh, er mellad 26 (3-de dilennad) e lennomp "amaj gant ar familhoù ar gwir da zibab doare an deskadurezh da reiñ d'o buçale".

En anv ar gwir-se moutret e klasker atav mougañ Diwan, nac'h ouzh ar familhoù a zo o c'houlenn e vefe digoret klasoù divyezhek nevez, e Redon, Tregastell, hag all, stummañ mistri -skol da gelenn e brezhoneg, krouiñ an DEUG...

Embannomp fraezh eta e vez graet fae war GWIRIOU MAB-DEN en hon Bro pa ne vez ket laket Diskleriadur 1948 da dalvezout, pa vez droukziforc'het ar Vrezhonegerien, pa chom hor yezh E-MAEZ AL LEZENN.

Ha bezomp poslek : na roomp mouez ebet d'an dud n'o deus graet mann ha n'int ket prest d'ober muioc'h evit gwellaat stad hon yezh. E-leizh a zo ? Ha neuze ?

M.K.

KOIZO

Pierre Joxe, ministr an Diabarzh war "EUROPE 1" :

"Mar goulenmont digant ur skarzhadeg Euskaria on prest d'ober".

Petra ne rafent ket evit gwerzhañ o zren TGV d'ar Spagnole!

OBEROU

Ministreezh an Arme eo implijer kentañ Korsika gant 4900 implijad. En Deskadurezh n'eus nemet 4700. Tra-walc'h zo da c'hallekaat ar vro ?

E keit ma oa Gorbatchev o ken-c'hloc'hariñ gant an Armenianed war dismantrou o ziez edo e bolis o vazhata Armenianed o vanifestiñ en Erevan. E penn ar vazh emañ ar perstroika.

E keit ma oa Mitterand oc'h enoriñ Gwirioù Mab-Den hag o diskleriadur graet e Pariz e 1948 edo e bolis o vazhata yaouankizoù Iran o vanifestiñ a-enep da C'homeini. E penn ar vazh emañ an doujañs da wirioù Mab-Den.

An hini a welfe ul liam etre an daou geloù-mañ a ve troet fall e spered...

TREC'H

Entilet eo bet Serj Richard e Brezhoneg en Akademiezh Versailles goude daou vloavezh stourm kalet ha didorr. Anvet eo bet "A.E." brezhonek d'ar 7 a viz Here 1988 ha div d'ederenn servij a zo bet fiziañ ennañ, ar pezh a ra 12 eurvezh. Labour a zo war ar stern eta a-benn tizhout ar pal a 18 eurvezh, ar post klok ! E foeter-bro a raio dre ma'z aio da vMeudon, Nanterre, Plaisir ha Massy da gelenn yezh hon tadou. Deut eo a-benn da vezañ anavezet gant ar Ministrerezh da heul krogad spontus mizioù du ar bloaz tremenet. Degas a reomp da soñj e oa da vezañ kalet da lile d'ober skol c'hallek. Nac'het en doa hag embannet war ar seilch ton warn-ugent e rafe un harz-debrin da embañ ouzh seurt diviz kevrenn. Adstallet e oa bet war Akademiezh Versailles an devezh a-raok kregiñ gant e yun.

DEN AR BLOAVEZH

TIME, ar sizhunieg amerikan, he deus paeuzet gant he boaz da envel "Den ar Bloavezh", evit dibab ur "blanedenn ar bloavezh", an DOUAR er bloaz-mañ, pa'z eus nousept re all naeto'h ha yac'husoc'h. Ma !

E-barzh ar gont-se e tegouezh ganimp, paotred ha merc'hed BREMAÑ, an uhelgefridi a envel "DEN AR BLOAVEZH".

N'hallomp ket kaout gwelloc'h eget Brice Lalonde paotr an Endro er gouarnamant gall, an hini a zo o vont da stourm ouzh ar saotreezh gant pegsuioù "En em glevout a rin gant an dud a ra ar douar-houarour-sot ha peget e vo savno "DAN-VEZ DANJERUS E-BARZH EVIT AR GWISKAD OZON" "Goude-se e o c'houlennin digant ar Praestizien dibab", emezañ.

N'ouzomp ket c'hoazh pe-seurt ment a vo d'ar pegsun a vo lakat war bombezenn Muroa. Tra-walc'h eo dimp krediñ e vo efedus.

2010
STAJOU WAR AN URZHIATAEREZH

EUSKADI DU HA KERZU



Doust ha tu vo, ur wech bennak, da reiñ deoc'h kelou a-zaore o tont eus Euskadi ? Ret eo lavarout ez eo bet du ha kerzu zoken an daou viz diwezhañ evit ar vroadelourien hag ar re a glask o skoazellañ. Anat deoc'h n'eus netra vat da c'hortoz digant ar galdoude socialist gant ha kastilhian. Evel daou gomper en em glev Fañch hag e wevelien ha Felipe hag e re.

Eus tu ar stourmoù e teu gwec'h ha gwec'h all betek enomp ur sonerezh dousoc'h d'hon divskouarn. Gant ar votadegoù tremenet hor boa bet tro da welet splann e oa bet c'hwitet politikererezh ar spont gant ar gouarnamant gall : ne oa ket bet krennet mouezhioù an "abertzale", pell a se. Gwellet a reomp ivez e vez prest an Euskariz da respont hep tro ma vez taget, bac'het, barnet unan anezho gant ar justiz roz: manifesta-degoù, devezhioù yun...

Klevet a reomp anv ivez eus ar c'hudennoù a sav pe gentoc'h a-bad etre div hentenn strategiezh kontrol, etre an hanternoz hag ar c'hreisteiz. Ha diaes eo a-wechoù kompren perak, da skwer, e vez skoazellet muoc'h ha kreñvoc'h ar re-puidi eget tud I.K.. Meur a res-pont, meur a abeg, hervez ar chapel hag ar sant. Lod a lavaro : krisoc'h eo stad ar stourmerien er c'hreisteiz, da ober

o deus gant ur framm gwskerezh miret gantañ doareoù amzer Fran-co. Re wir, siwaz ! Evit se daoust hag-eh eo brav stad ar brizonidi e Bro C'hall pa vez nac'het gant medisined Franses o c'has d'un ospital dereat forzh pegen izel e vefe o ye-c'hed, forzh pegen mac'hagnet e vefent dre c'hras kobied ar GIGN ?

Lod all a lavaro ez eo gwan-tre an ensav broadelour en Hanternoz ha ne vez ket heuliet tud IK gant ar bobl. An degouezhioù diwezhañ atav a ziskouez ez eus d'an nebeutañ ur menoz broadelour (gw. ar votou) a c'hell dont war c'horre pa vez tu d'henn ober hep bezañ gwil-gaset ingal gant ar chupennou-glas. Ret eo gouzout, avat, n'eo ket aes du-hont en em ziskle-riañ evel broadelour. Liv ar sponterezh a vez peget warnoc'h krak fia berr ha setu ar FliKed o tifoupañ en ho ti da furchal war an digarez oc'h bet gwelet gant hemañ pe hennezh, el lec'h-mañ pe el lec'h-hont, d'an deiz-mañ-deiz... pe war zigarez e-bet !

Lod, erfin, a lavaro c'hoazh : ma vez re a drubuilh en Hanternoz e vo diaesoc'h ar vuhez evit ar re all ha forzh penaos eo ret d'ar c'hreisteiz bezañ trec'h ha da c'houde vo gwelet. "Bezit fur hag ar para-do a vo roet deoc'h e fin ho puhez... pa viot krevet hag ho pro-ganeoc'h !".

Sur a-walc'h an emzalc'h-se a ra plijadur koulz da Felipe ha da Fañch. D'ar c'hastilhian, rak hennezh a oar mat e ya keñver-ha-keñver ar menoz broadelour en Hanternoz hag ar skoazell da ETA. Seul wanoc'h e vo an "abertzale" eus an tu-mañ, seul aesoc'h e vo d'ar c'Hallaoued en em glevout gantañ evit leuniañ charterioù war -zu Carbachel, ha didrouz-kaer. Plijadur a raio kement d'ar Gall Bras rak hennezh a oar mat e c'hellio marc'hata sioulloc'h gant e genseurt : "Kas a rin dit 30 repud, lezel a rin ar GAL da vont war e drankilite, ha te, lezel a ri din an tamn TGV da sevel, hag e c'helli digreskiñ war briz da legumaj !" (gw. emgav Montpellier e deroù viz Kerzu).

War dachenn ar bolitike-rezh diabarzh e c'hell Miter-rand bezañ laouen ivez gant an emzalc'h-se : lezel da grediñ n'eo ar vroadelourien nemet sponterien vil ha torfedourien (trugarez da Basque evit e gentel vat), an dra-se a zegas mouezhioù er votadegoù rak ar gentel a zo bet desket mat ivez gant "Pobl Bro C'hall", ha bremañ m'eo deut an OLP da vezañ lamet he fac'hedoù ez eo ret kaout ur spontaññ all. Gwasoc'h zo, ar soñjoù-se a zegas aon ha douetañs e-touez ar pobloù bihan (ne lavaran ket en ensavioù politikel broadelour met ar re-se zo dre-se en arvar da goll fiziñs an dud). Adalek



"EUSKADI-INFORMATIONS" E D'AR C'H AN ARCHERIEEN

ar poent-se e c'hell ar justiz c'hall pakañ, bac'hañ, barn e Hiziv an Euskariz, warc'hoazh piv ?

Evidoc'h da gaut un tañva (c'hwerv ar geusteuenn) ha peogwir edomp o kaozeal eus kelou fall pe vat setu un abadenn gelleier :

■ Echu eo gant harz-debriñ ar brizonidi. Kroget d'ar 6 a viz Du, echuet d'an 12 a viz Kerzu.

■ Prosez e Pariz a-enep da 3 repud ha da 8 den tamallet dezho o skoazell. Disoc'h ar match-eus 2 vloaz toullbac'h betek 10.

■ Prosez e Madrid d'an 9 a viz Kerzu. Evit bezañ ev ivez skoazellet ETA (hervez an tamaller ha daoust d'an diouer a brouennou) ez eo bet goulnennet 7 vloaz toullbac'h a-enep da JP Casabonne. E vreaetaer n'en deus ket bet gwir da gaozeal dirak al lez-varn.

■ Prosez Nat Cazarre e Baiona d'an 8 a viz Kerzu. Ar soner brudet-se en Euskadi a oa tamal -let dezhañ bezañ prenet 5 pe 6 dihuner. Kavet e oa bet ar mekanikoù iskis-se "dre zegouezh" gant ur marjo drammet o pourmen e galite. Da c'houde ez eo bet diampket gant ar polis an dihunerioù, ar marjo, hag un test all. Nec'het-bras e oa ar prokolor, pezh ne vir ket outañ da c'houlenn 3 pe 4 bloavezh toull.

■ D'an 9 a viz Kerzu Juan Carlos Arriaga 'oa bet profet d'ar Spagnoliz, barnet d'ar pevarilamm a-raok bezañ kaset d'an ospital (oc'h ober harz-debriñ 'oa bet)

■ Evit echuiñ, an dra nemetañ hoc'h eus bet klevet ha gwelet war holl wagennoù ha pajennoù hor mediaoù : deut int a-benn da lakaat o c'hrabanoù war Lucienne Fourcade, mignonez Bichu gant, echu gant Iparretarak. Koulskomp e peoc'h. Trugarez, Monsieur Joxe.

Echu gant ar c'heleier. Ne vo ket roet deoc'h ar meteo.

An dud komanantet d'ar gelaouenn Euskadi-Information hag a oa o c'hortoz niverenn miz Kerzu 88 n'eo devo bet nemet 2 follenn biskrivet. Koulskoude e oa skipailh ar gelaouenn o prientiñ un niverenn ispisial da geñver daou-ugentvet bloavezh Diskleriadur Etrevroadel Gwirioù Mab-Den gant ar Gwidoù-Unanet e 1948.

Goulet e oa bet digant 'Eva Forest, ar vredevegezh ha skrivagnerez, dezrann an 40 vloaz a waskerezh-se en Euskadi. 10 vloaz zo ivez e voe nac'het gant Pobl Euskadi Bonreizh Spagn, e miz Kerzu 1978.

Sed a oa un dro da embann kreñv al liamm etre Gwirioù Mab-Den ha Gwirioù ar Pobloù.

Diskouezet e oa ivez penaos e oa bet skarzhet daou repud politikel euskarat tra ma oa ar pennadurezhioù gall o te-gemer Walesa ha Sakharov da li-dañ en o doare Diskleriadur ar Broadoù Unanet.

Kaoc'h a oa ivez eus ar gwaskerezh, a zeiz da zeiz, eus ar bouevierezh en Euskadi, eus an argadennoù poliserien, eus saviad ar vac'hidi bolitikel euskarat, ken er stad c'hall ken er stad spagnat.

PAOTRED MARI-ROBIN A OAR LENN!

Kement-se a oa bet chouket er gompederez, prest da voulañ. Met d'al Lun 12 a viz Kerzu eo bet paotred Mari Robin o furchal ti ar vizskriverez e Baiona, ha kaset ganto ar pladennoù, an ardivink, ar pennadoù hep lezel tra war o lerc'h. Emañ pep tra hiziv e Pariz e ti ar barnier-enklasker. Setu penaos e klasker mirout a embann kelaouennoù diwar-benn Gwirioù Mab-Den er stad a embann bezañ mamm dezho !

N'ankounac'haomp ket ivez e talc'h da vezañ berzet gant ar stad al levr (aostret e Bro-Spagn !) EUSKADI GOUARN (Euskadi o stourm). Bloavezh mat da Wirioù Mab-Den en Euskadi, en desped d'ar chas gall ha spagnat a vez o klask o drailhañ ZORIONAK. ■

DEMOKRATELEZH
HA DROUKZIFORC'HEREZH
E BRELIOU EUROPA

D'ar 15 a viz Kerzu e oa aet dileuridi eus Euskadi da ginnig da Vreujou Europa an 300 000 sinatur dastumet gant **BATZINIK** evit euska-rekaat ar vro, ambrouget gant an daou gannad broadelour Karlos Garaikoetxea (Euskal Alkartasuna) ha Txema Montero (Herri Batasuna). Nac'het en deus Prezidant Breujou Europa, ar mirour saoz Henry Plumb, degemer Montero, petra bennak ma'z eo esel eus an etrestrollad diwar-benn ar yezhoù bihanaet. Txema Montero en deus embannet goude e oa "Lorc'h emañ e vije graet dezhañ evel da Tasser Ararat un tam a-raok, peogwir ez omp dileuridi eus gant hom jobloù da sevel o stadoù". ■



U.D.B. HA PRIZONIDI BOLITIKEL

EUSKARAT

En ur gemennadenn a-berzh Burev Darempredoù Diavaez UDB e sav ar strollad-mañ a-enep an doareoù ma vez graet war-dro bac'hidi bolitikel Euskadi, ha goulnenn a ra ma vo roet dezho ar statud politikel ma vint bodet en ur bac'h e Bro Euskadi, ha ma vo gwellaet o stad-vac'hidi. ■

bremañ

KOUMANANT
BLOAZ

120 lur

SAB Stourm Ar Brezhones



D'al lun 23 a viz Genver e vo barnet adarre Herve ar Beg, J.Y. Gwern, J.J. Henry ha Mikael Korle evit bezañ kemeret perzh e manifesta- deg Montroulez e 1984, gant panelloù dindan o c'hazel.

Pedet eo mignoned ar baotred-se (ha re ar Brezhoneg) da vont da lidañ an darvoud e Lez- varn Gwengamp en deiz-se da 2e. g.m.

AR BREZHONEG ?

N'EO KET PREDER AN DILENNIDI

Dimeurzh 20 a viz Kerzu 88 edo dilennidi ar C'huzul- e Rannvro o prederiañ e Pondivi ouzh ar politikerezh sevenadurel. C'hwec'h amkan, e- hanter an Itron Sauvet, bezprezi- dantez a zo bet termenet :

- 1- Ingalañ gwelloc'h al labour etre ar rannvro hag an departamantoù ;
- 2- Brudañ "sevenadur Breizh" ;
- 3- Aozañ gwelloc'h obere- rezh ar "binvioù rannvro" (Skol Uhel ar Vro, ARC...) ;
- 4- Kevredañ an intrudu lec'hel ;
- 5- Kreskiñ barregezh vi- chereal an "obererien sevenadur- el" ;
- 6- Talvoudekaat sevenadur Breizh en diavaez hag en dia- barzh.

Diwar-benn ar Brezhoneg, GER EBET !

KOMZOU FLOUR

Abaoe 1914 emañ ar Brezhoneg war an diskar hep na savje hon dilennidi ho mouezh da enebiañ (pe unanig bennak hep muiken).

Ha koulskoude, unan a zaou : pe rankout a ra ar Brezhoneg mervel, ha neuze emañ ar gwir gant an dud vat-mañ chom diseblant, pe rankout a ra be- vañ, ha bezañ skoazellet da greskiñ ha diorren.

Evit bremañ, o vezañ ma ne weler ket anezho oc'h ober estroc'h evit komzou flour, n'eus ket tu da grediñ e soñ- jont ez eus un dazont bennak gant hon yezh. Neuze, ma vije un tamm onestiz enne, e tlejent hel larout splann d'o dilen- nerien.

A-hend-all, ma savje an disterañ morc'hed en o c'halon, e vije poent-bras dezho stagañ gant an ober.

BREZHONEG DA GENTAN

Ha neuze diskleriañ uhel emañ ar BREZHONEG e-touez ar prederioù kentañ e politikerezh sevenadurel Breizh, ha reiñ de- zhañ kement arc'hant ha d'ar prederioù all.

A-benn neuze e vefe ret skoazellañ an aozadurioù a ge- lenn ar yezh ha marteze sikour da skoazellañ aozadurioù efedu- soc'h moarvat, evit reiñ tu da niver ar vrezhonegerien da greskiñ, pezh a vefe a-bouez en armerzh an embann hag ar c'hrouiñ brezhoneg. Rak evit bremañ n'hall ket an embann brezhoneg diorren en un endro kazetennoù ha skinwel a zianav kement tra a vez savet en hon yezh.

Rak da betra e servij ar yalc'hadoù d'an embannerien vrezhoneg ma ne glasker ket kreskiñ niver o lennerien ?

Ha kreskiñ niver ar vre- zhonegerien, a dalv kement ha kelenn ar yezh e pep lec'h. Er skolioù stad ha relijiel, her- vez ali ar gelennerien, e se- blant gwall ziaes er stad a- mañ an traoù en deiz a hiriv. Ret e ve gortoz (betek peur ?) un adkempenn d'ar skoliata na seblant ket bezañ prest da zont evit ma paouezfe ar velestradur- rezh da voc'hañ labour ar ge- lennerien vrezhoneg, hag evit ma c'hellefe bezañ urzhiet un tamm o labour.

Er c'hontrol, an emsav sevenadurel a zo bet frouezhus peogwir en deus stummet evit ar stad tost an holl gelennerien, er c'hentañ kouz hag en eil derez, a zo hiriv o kelenn brezhoneg, en desped d'ar skolioù ha d'an antelloù stignet gant ar velestradurezh, hag hep gwen- zeg skoazell ebet, hiriv kouz hag dec'h...

Bremañ, ma chom un tamm efedusted gant an emsav, e vefe poent dezhañ diskouez, ha fram- mañ neuze Kelenn hon Yezh en hon Bro, ha rediañ an dilennidi da bledañ gant skignerezh ar brezhoneg ha da skoazellañ er- vat. Ha kement hag ober gant a- benn ar fin ar statud a yezh ofi- siel a zlefe ar Brezhoneg ka- out e Breizh.

Rak sklaer e tle bezañ : n'hor bo digant an dilennidi nemet ar pezh a vimp kreñv a- walc'h d'o rediañ da reiñ dimp. Ma n'omp ket, labouromp da ve- zañ.

Erwan Gargal.

SAB A GROU LABOUR E BREIZH

SERJ COGLIN
STOURMER EN ARVAR

Strolladoù 'zo o deus sa- vet o mouezh da zifenn Serj Coglin, ar stourmer kondaonet evit bezañ livet pa- nelloù hag en arvar da goll e labour.

Dimp da c'houzout o deus Frankiz Breizh, Unvaniezh ar Gelennerien, Gwezenn (Redon), Kreizenn Sevenadurel Brezhon Gwengamp, hag ar C'huzul Etre- vroadel evit Kendalc'h ar Brezhoneg (Brussel), skrivet da renerien ar P.I.T., gall da glemm. Tud all evel maered Lan- deda ha Karazec o deus graet i- vez.

N'eo ket a-walc'h kondoa- niñ ur stourmer, ret eo dezho e gastizañ en e labour : gwall bell emañ ar seurt emzalc'h diouzh doujañ Gwarioù Mab-Den a vez lidet gant ar stad c'hall war an ton bras.

Lizhiri all zo bet kaset da g-"Kevre Gwarioù Mab-Den", "Amnesty", ha sindikadoù labour- erien ar Postoù.

PANELLOU

Bodadeg a oa bet d'an 20 a viz Kerzu gant Aime Kergeris, Kannad, J.Y. Le Touze (Emglev Bro an Orient) ha Daniel Carre (Kerlenn Sten Kid- na), Lukian Kergoat (Skol Uhel ar Vro) ha dilennidi eus servij- où teknikel ar Stad hag an De- partamant e Porzh Loeiz, diwar- benn panelloù divyezhek er Mor- Bihan.

Gwélet eo bet ar c'huden- noù a save hag an diskoulmoù a veze roet e broioù all Europa. Bodadegoù all a vo a-benn ka- vout diskoulmoù resis en depar- tamant.

Ar wech kentañ eo e vefe divizoù etre ar pennadurezhioù departamant hag an emsav sevenadurel diwar-benn ar panelloù- lec'h. N'eus bet netra heñvel c'hoazh e Penn ar Bed en Adoù an Hanternoz nag er re all.

Deuet e oa JACK LANG, mi- nistr gall ar sevenadur, betek Sant Brieq d'ar 16 a viz Kerzu 1988. Tu en deus bet da goma diwar-benn hor yezh, ha da nebeutañ, diwar-benn ar pa- nelloù-hent. Prometet oa bet gantañ, e miz Eost 1985, lakaat panelloù-hent en hor yezh war bord hentoù hor Bro. Abaoe, si- wash, n'hon eus ket gwelet pi- kol tra o tont, nemet war bord un nebeut heñchoù departamant, e Kormog aoc'h an hanternoz ; a-berañ ar stad c'hall war an heñchoù bras, mamm ebet !

Bremañ ne gav an aotrou Lang netra da lavaret nemet : "N'eus ket un arbennigour ane-

zhañ" evit pezh a sell an hen- toù... Brav !!!

Diwar-benn budjed e vi- nistrerezh en doa bet tro da gaozeal iwe. N'en doa kavet kals a dra da respont avat da c'houlennoù ar gastermerien diwar-benn an digempouez zo e- tre an ara'hant distiget evit ar sevenadur e korn bro Paris hag e Breizh...

88 % eus budjed ar vini- strerezh evit sevenadur Paris hag 1,2 % evit 4 eus 5 depar- tamant Breizh (sifroù ofisiel 86)

S.A.B.



Labour-deiz, goude labour-noz... a-drugarez da S.A.B. (skeudenn O.F.)

Savet ez eus bet, e miz Meurzh diwezhañ, ur gom- pagnunezh SEDIMO staliet e Roazon hag oc'h implij 10 den -Unan eus skourroù "rannvroel" ar SITA (ur skourr eus al "Lyon -naise des Eaux") eo ar SEDIMO. Ha labourat a ra er 5 depar- tamant hag er Mayenne.

Dastum lastez chanterioù a ra ar kompagnunezh hag emañ o klask lec'hioù da zouarañ e loustoni ; bec'h zo bet n'eus ket pell gant parrez Treverien (etre Roazon ha Sant Malo) na felle ket dezhi he degemer (eus an atredoù-tiez d'ur breinaj nukleel ne vez ket pell da vont).

Hiziv 'ta, da c'hortoz gwell, ez eus lorc'h bras e penn ar SEDIMO gant he sistem OIGA, a servij da naetaat ar panelloù hent labezet a goltar war hentoù bras hon bro. Kirri- samm gant kaoterioù-aezhenn domm a vez implijet.

Brav e vije gouzout pege- ment e koust an traoù-se d'an departamantoù, ha gouzout hag eñ ne vije ket nac'had-matoc'h ober gant panelloù divyezhek na vefent ket labezet.

Da c'hortoz e c'hall tud SAB fougeal e krouont labour e Breizh ; labezañ ha dilabezañ sed-zo labourat, keta ?

bremañ

MAB AN DIG

Sed aze un anv 'vat ! Pe gentoc'h ul lesanv rak "Ar Big" a raed eus e vamm, a-hont e parrezig Lambaol -harp e Gwitalmeze.-

Piv, e-touez ar vrezhonegerien nebutoc'h eget daou ugent vloaz dezho a c'helle lavaret ec'h anavezze skridoù ar skrivagner-mañ, bremañ ez eus bloaz c'hoazh ? Nemet ha troet e vefe bet da glask er c'hazetennoù kozh boued sperezhoneg, pa ne gaver ket awalc'h e-touez al levrioù a c'heller da bremañ er pontoù-mañ. Pe neuze o chom e Goueled Leon, e vro.

Ha koulskoude, setu ur skrivagner a gontan me, asambles gant Abeozen, evit unan eus an daou skrivagner brezhoneg gwellañ a Vro Leon a zo echu o oberenn, marv ma 'z int o daou. Souezusañ klevet marteze eo o doa ar memes anv familh Elias ! Un anv a zo bet brudet ivez, dre ur stumm disheñvelig, gant ur bigouter. Anv un diouganer, kea !

Ma 'mefe ket soñjet e oa ur skrivagner a dalvoudegezh vras 'mefe ket roet an amzer hag an nerzh a zo bet dav da lakaat adembann lod kaer eus e skridoù komz plaen brezhoneg.

MET PIV OA MAB AN DIG ?

Ganet er bloavezh 1910 e Porsal (Goueled Leon), savet e Lambaol (Gwitalmeze) e oa Biel Elias eus gouenn ar vrezhonegerien a-vihanig-se n'eo deus morse troet kein ouzh yezh o c'ha-vell. Aet da veleg, edo dizale kure e Sant Pabu hag eno e chomas, paneved bloavezhioù ar brezel, betek 1954. Neuze ez eas da aluzenner arme c'hall an aer ! Tro evelise dezhañ da anavezout tachadoù eus Afrika an Hanternoz. Warlerc'h un dek bloavezh bennak, setu eñ en di-zro hag e 1978 e varvas e Brest.

E PELEC'H E KAVED E SKRIDOU ?



Bezot sklaer un dra ker-kent evit an holl, ul leonad e oa ha n'eus bet morse embannet skridoù gantañ an doare-skrivañ peurunvan. Setu an dud strizh a sperezhoneg diouzh kriterioù droch a seurt-se, a zo pedet da vont d'an aod da dreñ bill da sec'hañ kentoc'h eget klevet meuleudi un den ne lousfent ket o daoulagad o sellet ouzh e skridoù. Evelse bezot graet !

Ar re o deus bet an eurvad da dapout krog e niverennoù kentañ Brud ("kozh"), ken dudius alies an danvez lenn enno, o doa soñj marteze eus "kizhier Nozh Sant Pabu". A-hend-all, ne gaved diouzh e blumenn nemet daou zastumadig a varzhonegoù. Met a-fed barzhoniezh int dister, d'am mennoz.

Skridoù embannet gantañ a oa koulskoude hag a-leiz met turiañ paper kozh a ranked, dreist-holl e Bleun Brug. Skridoù berr eo peurliesañ a gentoc'h eus un niverenn d'eben. Eus ar mod a vez plijadur ouzh o lenn met ne zalc'her ket soñj anezho pell.

A-hend-all e oa ivez (hag atav ez eus) ur guchennig vras a skridoù diembann.

PETRA EN DOA SKRIVET ?

Ar peb dedennusañ eus skridoù Mab an Dig eo, d'am mennoz, an holl skridoù berrese, pe krenn d'ar muiañ, gwir zanevelloù anezho e gwirionez, a gaver melezeoret enno ar pezh en deus gwelet war e dro, ken e Bro Leon hag e lec'h all, pe zoken ar pezh en deus betwe. N'eo tamm ebet dispartit buhez an den diouzh e oberenn, ar c'hontrol bev. Dre o danvez e c'heller didoueziañ ar skridoù-mañ e tri rum dreist-holl.

Da gentañ hag ar fonnusañ -ema bern ar skridoù o tennañ da gevredigezh war ar maez Bro Leon e div barrez dreist-holl. Lambaol ha Sant Pabu.- D'am mennoz e oa eno pep talvoudusañ o-berenn an den.

bremañ 10

MAB AN DIG

Da eil, ur rumm all, ken talvoudus all a-fed skrid, paneved eo kalz berroc'h, hini ar skridoù o tennañ d'e vuhez a brizoniad brezel.

Da drede e oa rumm ar skridoù, war zispartit dre o stumm diavaez (pennadoù kaoz skrivet ez int, sañset) e lec'h ma ra anv eus Afrika an Hanternoz.

A-hend-all en doa skrivet traoù all, pennadoù diseurtoc'h -ha dreist-holl en doa klasket skrivañ romantoù.- Daou roman-tig krenn en doa savet ("Arme-ria" ha "Viviana"). N'em eus ket soñjet e talvezent ar boan o embann... ! Brezhoneg mat a gaver enno mat, a-bell, ne dalvezont ket ar skridoù em eus meneget dija, ha pa vefe sañset dezho bezañ lennegezh penn da benn. C'huitañ war e daol en doa graet ar skrivagner ganto, d'am soñj. Neb a garfe gwelet evitañ e-unan n'en deus nemet mont da lenn an dornskridoù e levraoueg abati Landevenneg.

PETRA EO "DOARE" MAB AN DIG ?

Kroget on da studiañ ar skridoù em boa choazet da embann hag ar re all. Peadra, d'am soñj, da sevel un hir a studia-denn ha n'eo ket he flas amañ, ouzhpenn ma n'eo ket echu. Deoc'h da c'houzout memestra em eus kavet peadra d'ober e tro pevar c'hant pajennad a gontan me evel lennegezh eus ar gwellañ. Kement all ne c'heller ket lavaret diwarbenn an holl skrivagnerien brezhoneg a zo marv. Ha padal edo ar skrivagner war nes bezañ "ankounac'haet", pe gentoc'h, n'oa anavezet e mod ebet gant ar rummadoù yaouankoc'h.

Seul vuioch e studian skridoù Mab an Dig, seul sple-tusoc'h eo din ha seul vuioch o c'havan. Ne c'hellan ket lavaret kement all diwarbenn an holl, kernebeud. Petra 'ra e zoare ?

Da gentañ, an den en e bezh eo a santer a-dreñv kein ar skridoù. Un den taer diouzh un tu, ha tener tre a-hend-all.

Ur gwir gristen ha n'eo e mod ebet ur chuchuenne pe ur sperezhoneg ha pilpous. Un den a garantez, evit e vro hag evit an dud. Un den a sperezhoneg ha uhelegezh. Ur c'hanteller dig -par hep an disterrañ randone-rezh na prezeg goullou.

Ha dreist-holl un den en doa un emzalc'h ya'c'h kenañ e-keñver ar vuhez, ya'c'h, laouen, kempouez. Bepred prast da c'hoarzhin, da c'hoapaat a nesa zoken (ha pebezh teodoù gantañ, a-wechoù !). Ma c'houzañ -ve aes bezañ goapaat e-unan gant ar re all emichañs peogwir hen grae asidu e-unan. Ur ral kement-mañ e bedig strizh o zoullig ensaverien daer ha sklaer randonus zo, hag e hini randonusoc'h c'hoazh war zia-vaez, ur ouenn a veleien a rene c'hoazh war Vro Leon betek n'eus ket pell. Un den dichipod, plijadur, bepred fant en e laqad hag en e skridoù. Un den a ziskoueze bezañ gouezet bevañ seder ! Hag al laouenedigezh, ar soderded-mañ eo intreret ganto e skridoù. Ha skridoù, ouzhpenn-se, a zo enno ul lusk nervus kenañ, ma 'z ar dezho a-lamm ma n'eo ket d'ar c'haloup.

Gouzañvus ivez, kenañ, e-keñver ar pezh a oa disheñvel diouzh nemet ha disheñvel a galon e vefed. Bezañ en doa anavezet en e vugalezh buhez reuzedig renkad an devezhourien. E-pad ar brezel eo bet darbed dezhañ mervel gant an naon, estreget ur wech. A-leizh

e fri en deus paket diwar goust pilpousiaj ar gevredigezh edo enni o vevañ. Ha na oa tener e galon, e zorn ne oa ket ! Na pet e Sant Pabu a gonto deoc'h pebezh skolaer e oa ha penaos e rene warno.

LENNEGEZH ?

Daoust neuze ha petra 'laka Mab an Dig disheñvel diouzh an dud a relijion se o deus skrivet ivez diwar-benn buhez war maez Bro Leon d'ar poent ma oa c'hoazh holl vrezhoneg pe dost ? Da lavaret eo tud evel Visant Sete pe an Tad Medar (hemañ ivez un teod lemm hag ur flemmer a zen, pa gare) ? Un testi eo levrioù ar re-mañ. O brezhoneg un druzañ e lenn, da vihanañ pa ne vez ket gwaret ar sperezhoneg aferioù diavaez talvoudegezh ur skrid, Leongasouriezh klañvidig, da skwer. Tadennoù bev buhez eo deus gouezet reiñ deomp. Ha taolennou gwirion.

Ha koulskoude ez eus e skridoù gwellañ Mab an Dig, a zo tevig mat ar bern anezho, ur perzh o laka war zispartit diouzh ar re-mañ hag a ra din soñjal hep marc'hata en holl eo lennegezh ez int. O, testi int ivez, met ouzhpenn, uhelloc'h hag an dra-se. Pelec'h e-ma enno, hep gallet lakaat va biz warnañ. E fent nemetken ? An tad Medar ivez a fente, ne-



bremañ 11

MAB AN DIG



Ma klaskan keveriañ berr -ha-berr arz an daou zaneveller -mañ en o gwellañ e choman ne- c'h et evit lakaat un urzh. Yec- h'ig, klaseloc'h eo Aboezen. Tommoc'h, bourjinoc'h, dizur- zhoc'h eo Mab an Dig. D'am soñj avat e oa donezetoc'h eget Aboezen. Hemañ a sille e skridoù en e spered. Egile edo en e gal- lon o eienenn.

Met ma lakan en ur geñver ar bern skridoù a ouenn wellañ gant an eil hag egile, e rankan reiñ ar maout da Mab an Dig. Va soñj edo, ha metra ken. Tud all a rafe unan all. Rak din, da skwer, e plij kenañ an implij eus ar yezh skrivet a ra alie- soc'h Mab an Dig. Santeloc'h, a zonoc'h, e kavan eo darempred- ou an dud etrezo en e skridoù. M'en defe Aboezen klaskek pol- tredañ en he fezh kevredigezh kâr Landi e tro 1910 en ur ro- mant war ur par gant "Nenn Jani" Roparz Hemon, ya, diaesoc'h din c'hoazh e vefe.

.....

UN ALI

.....

Feiz, petra nemet lenn ho unan skridoù Mab an Dig, anat deoc'h. Lenn hag adlenn. Ha ma' z eo un ali fall, neuze e ran- kan bezañ a bep tu luch pe zall !

Met, eveljust, ma 'z eo diouzh ideologiezh un den e varnit talvoudegezh al lenne- gezh a skriv... Neuze 'vat. ■

Mikael Madeg

"Mab an Dig" : ur choaz eus e skridoù brezhoneg embannet gant "Ar skoll dre lizer". Al levrenn gentañ (212 paj. 78 lur) a ga- ver da verzhañ, an eil a zo da beurlouañ e mizioù kentañ 89.

Kenvezioù ker,

Setu amañ va c'houmanant evit 1989 d'ho kelaouenn Bremañ Kalz plijadur am bez bepred o lenn ar pennoù nemet daou vis 'tao memestra e kavan e oa Ganan ar Meur aet re bell gant. Ma n'em deus ket bet an liz ar politikerezh direbech atav e- keñver an Emao, ar flipadoù hag an teodoù c'houevr ne zis- koulont ket un gudenn ha ret eo d'hañ kont eus an hengoun kristen a zo bet a-viskoazh e Breizh.

Kas a ran deoc'h ur c'hou- manant nevez evit va mab deoc'h ober e emser-serrij er Martinek. Kenañ ha bloavezh mat d'an holl re a labour var- dro Bremañ.

Loeiz Bihannig (Sant Malo)

Da Renar ar gelaouenn,

Ur wech ma'oc'h on bet feuket meurbed en ur lenn pe- Jem "Mesk-Divesk" skrivet gant Ganan ar Meur. N'eus ket pell dija en doa skrivet traoù euz- zhus diwar-benn ar gristenien, hag a lakent da hanon da soñj d'ar pesh a vefe Lavat diwar- benn ar Yusevien e-pad ar bre- zel. Bez ez eus tud a volentes vat e-touez ar gristenien ke- ment hag e-touez ar re ne gre- dont e Doue hepken. Met ne fell ket da planestriz diwar-benn- se -aklaeriet e oa bet an traoù gant renerzh ar gelaouenn da c'houde, pa oa bet goulet d'an den-se treiñ seta gwech e c'houevr en e zorn a-raok skrivañ. Hag hiriv e lenn ur ba- jenn gouezet da enor an drom- moul ! N'on ket evit krediñ va daoulagad pa lenn "N'eo ket abalamour int dañjerus e vez lakaet berz evit an drommou, dañjerus e vezont peogwir e vezont difennet". N'anavezin ket an den an deus skrivet seurt sotoni, nartese en deus bugale; ne souhetan ket d'hañ gwelout e vab pe e verc'h tapet gant an drommou.

N'eo ket peogwir e vez lazhet ur bern tud gant an al- kool ma ves ret goulen memestra evit an drommou ! Un doare izikis eo da brederiañ ! Memes- tra evit "koñvers kuzh an ar- mou". Gwelloc'h e vefe embannet outañ eget goulen diversañ an drommou.

Skrivet eo bet gant Mi- kael Baudu (rener ar gazetenn) e vefe kiriek pep akritagner deus ar pesh e vese lakaet ar gelaouenn. Sur ez eo, met bez ez eus haroù da lakaat. N'on ket evit lakaat da greññ ur gelaouenn a skign soñjoù ur beurt-se. N'eo nemet dre sou- jañs d'ar stourm evit ar bre- zhoneg hag evit ar vro a ves renet gant "Bremañ" ma choman komanantet. Met ne bado ket ma fiasanted a-viskoazh !

A wir galon,
Youenn Roandrud (Sant Segal)

bremañ 13



GALLEGERTEZH

Montgeron (Bro-Bariz)

Setu respont ar Ministr ouzh goulen an Ao. Pelchat, kan- nad departamant Eoma; emban- net e oa bet hemañ e brezhoneg 1) war niverenn 86 (Du 88) BREMAN (p. 8).

Setu ar pesh an eus lenn- net war gazetenn ofisiel ar Repu- blik Gall (J.O.) d'an 28.11. 1988 :

GALLEGERTEZH

Politikerezh estren

2460-19.09.88 - An Ao. Michel Pelchat a c'houlen digant an is-Ministr, lakaet dindan Mi- nistr-Stad an Aferioù Estren ha karget eus ar c'hallegeriezh, daoust ha ne gav ket noasur di- orren ar yezhoù anvet ranvroel en tiriadoù tramor gall (T.O.M) dreist-holl er Mor Habask, e- keñver skignerezh hor yezh er c'hornioù-se eus ar bed.

Respont : E tiriadoù Polinezia C'hall, Kaledonia-Nevez ha Wal- lis-ha-Futuna emañ implij ar yezhoù-lec'h ur fed eus buhez ar familioù hag ar gevredigezh -un tamm eus o sevenadur-int eo evit poblañsoù ar Mor-Habask. -Koulskoude e chom bevneted ta- chennad-implij ar yezhoù-se rak, diouzh un tu, ez int bruz- met e-bras (30 rannyezh a gon- ter evel-se e Kaledonia Nevez) hag, ouzhpenn, ne vezont impli- jet peurlouañ nemet dre gomz. N'eus nemet yezh Tahti he defe gwirioù ispisial rak, e Poline- zia ez eus ur yezh ofisiel anez- hañ, e par gant ar Galleg. Ar statur emrenerzh melestradurel a zo hini an tiriadoù tramor a ro aotro dezho da ober ar pesh di- gavont mat evit gwareziñ ha l'orren o feadra sevenadurel ha chom dindan veli ar Stad hag ar vugale ne vezont skoliataet ne- met e Galleg, en hevelep doare hag er Penvro. An doareoù pe- zasaet ouz dibarderioù an tiri- adoù-se (an divyezhezh da

EMBANNET ER J.O.

skwer), evel m'eo bet meneget er Fentañ-kont kelaouñ graet en anv Komision Aferioù Sevena- durel ar Sened, da heul ur veaj kelaouñ graet etre ar 5 hag an 21.02.88 evit studiañ e Poline- zia C'hall, Kaledonia Nevez hag Aostralia (?) penaos aozañ Skol Veur ar Mor Habask ha penaos kelenn ha skignañ gweiloc'h ar Galleg du-se. Kavout a ra mat ivez ar gomision e vefe posubl lakaat ar yezhoù-lec'h e-touez an traoù desket er skolioù. A- rabat kaout aon avat e teufe ar yezhoù-se lec'hel pe rann- vroel da vezañ notus ouz da- vrent ar Galleg, hemañ a gen- dalc'ho da vezañ kelennet d'hor holl genvezioù tramor ha da ve- zañ brudet dre holl vroioù an tamm-se eus ar bed. Krouidigezh nevez Skol Veur ar Mor-Habask gant ar Stad a ziskouez splann e teu da vat ar sturioù graet evit stummañ gweiloc'h tud an tiriadoù tramor e-bras fram- klok an deskadurezh broadel hag evit kreskiñ niver ar c'hallegerie- ven e-touez pennoù-bras bro- ioù ar Mor-Habask. ■

Setu : ra lermo pish pep hini !

Bernez Kadored

YEZH BRO-ELZAS

Kenteluz e ves bepred lenn gazetenn ofisiel ar Repu- blik Gall (pegen borodus hemañ m'eo !), dreist-holl ar goulen- nou graet gant deputed pe be- nedourien ouz ar vintadred (hag o respontoù eveljust !).

Setu ar pesh an eus lenn- net nevez-se, diwar-benn kuden- nou-yezh Bro-C'hall :

Goullenn niv.6539 -12.12.88. - An ao.Emil KOEHL (anezhañ un depu- te UDP eus departamant ar Roen- Isel, pe gweiloc'h lavaret, eus Elzas-Isel) a regas da soñj ar Ministr-Stad karget eus an Des- kadurezh-stad, ar Yaouankiz hag ar Sportoù, ez eus bet diskle- riet gant an Ao. Prezidant ar Republik e c'hoant ha vefe dig- gor frank dorioù ar skolioù d'hor yezhoù-rannvro. Implij ar re-mañ keent hag ar yezhoù broadel, setu ar pesh a ranker ober en dazont. Ar Stad a dife o berz er c'heñver-se. Goullenn a ra an Ao. KOEHL ar pesh emañ ar Ministr-Stad e soñj ober e- vit ma teufe an Alamaneg -yez- rannvro Bro-Elzas da vezañ im- plijet ivez evit kelenn danve- zioù zo.

Goullenn niv.1783 -06.10.88. - O vezañ m'eo mat-tre al labour graet gant skolidi ar skolioù-

mann ha lañ derez ma vez kelen- net enno ur yezh estren, e c'hou- lenn an Ao. Jaker MACHET (anez- zhañ ur senedour VC eus depart- amant ar Mar) digant ar Mi- nistr-Stad karget eus an Deska- durezh-Stad, ar Yaouankiz hag ar Sportoù petra emañ e soñj ober, e sell unanidigezh Europa er bloaz 1992, evit ma vefe graet heñvel e keent skol-mañ ha keent skol lañ derez.

Respont ar Ministr d'ar goulen- nou a-us embannet e "J.O." ar 15.12.1988 :


Bremañ ne vez rakwelet gant ar program ofisiel ke- lennadurezh yezh vev estren e- bet (er skolioù-mañ ha lañ de- rez). Setu perak e rank seurt kelennadurezh, pa vez graet e- pad an eurvezhoù-skol, bezañ astreet gant an enseller-akade- mizeh a ren servijoù departa- mant an Deskadurezh-Stad, dreist- holl evit urzhiañ an eurvezhoù- skol en doare rekis. Ar mi- nistr-Stad en deus kemennet e soñj da lakaat e plas, adalek ar skolioù lañ derez, kelenn- adurezh ur yezh vev estren. Ur gomision-brederiañ a zo o paou- ez bezañ savet. He c'hefridi eo aozañ un taol-esa, war an da- cheñn vroadel ("une experimen- tation à caractère national), adalek deroù ar bloavezh-skol '89/90 evit gwelet spisoù- h petra e vefe palioù ur seurt kelennadurezh ha penaos e vefe graet. Klask a ralo ar gomision- se labourant gant an holl re dedennet ("associer tous les partenaires")ha dreist-holl, ar galloudoù-lec'h ("collectivités locales"). Daoust hag e pep skol e vo graet seurt kelenn- adurezh, ha penaos e vo graet, an dra-mañ e vo termenet pa vo echu an taol-esa. ■

Traoù nevez eta war da- cheñn ar c'houevr yezhoù rann- galleg (ha zoken kelenn danve- zioù zo dre ar yezhoù-se, Al- amaneg Bro-Elzas da skwer) e skolioù lañ derez ar Stad c'hall !

Da zivall e vo avat ! Rak mard eo an Alamaneg "yezh-rann- vro Bro-Elzas" kouls ha yezh pennoù Europa 1992 e-keñver e- om, amañ e Breizh, e vefe tud vat, ha "soñj" ur tamm mat, o klask saonekaat hor bugale an abretañ ar gwellañ, en ur gas evit-se hor yezh er-mez eus ar skolioù (daoust pegen dister m'eo c'hoazh he flas emmo !).

Bernez Kadored.

bremañ 13



KAZETENNOU

LE PEUPLE BRETON, a oa gant e niverenn 300 e miz Kerzu, a ginnige de lenne-riar ur skwerenn eus an hini gentañ (Genver 1964). Ouzhpenn al lodenn vrezhonek peder fajenn e tesker un toullad traou e-barzh a-zivout buhez U.D.B., a zo o paouez prenañ un ti e kêr Naoned.

Er pennad a zispleg petra zo kemmet er vro abaoe ar 25 bloaz-se ne weler ket mat petra eo bet labour UDB evit ar yezh, abaoe marv GALV da vihanañ. Tud zo a laro n'eo ket souezhus...

Diwar-benn kendalc'h UDB ne weler ket e kemefe politike-rezh UDB stag ouzh ar PS atav, a bromet diwar-benn Mitterrand pa gromete adstagañ Naoned ouzh Breizh. Neuze e Kaver ur blaz iskis gant adembannadur pennad Morvan Ar Besk, skrivet e 1968, a live dimp un dazont du, "nemet e ve trec'h an tu kleiz". Gast!

Trec'h hiziv an tu kleiz, pe liv gant an dazont ? ■

EMPANN (niverenn 41 miz Kerzu) a gaver ennañ peder fajenn vrezhonek en taol-mañ ivez. Unan gant Herve ar Beg o respont da bennad Mikael Treger diwar-benn stad ar skinwel brezhonek.

A-hend-all, ouzhpenn pennadoù diwar-benn kudennoù an DEUC, an Uranion, e vo desket e striv Empann da sevel ul listenn gant pobloù gwasket ar Stad c'hall a-benn dilennadeg europat 1989 (p'emañ UDB o klask ober kemend all diouzh he zu). ■

BEP DAOU VIZ LENNIT

AL LANV

59, hent

KERDRONDU VIVAN

29000 Kemper

KOUMANANT BLOAZ 100 l

SKOAZELL : adalek 150 lur.

CARN (niv. 63, diskar-am-zer 1988). Ar re ac'hanoch a lenn saozneg hag a glask keleier diwar-benn ar broioù keltiek n'hallont ket kavout gwelloc'h eget CARN, kelouenn ar C'Hevre Keltiek.

Ar re all a gavo ur pennad brezhonek kentelius, gant Alan Heussaff diwar-benn an "Arvesterien Skinwel" a c'hallfe bezañ bet kinniget da v-Mikael Treger. (Koumanant 60 lur, digant Youenn Kraff -Talbodek-Beilh. 29130 Kemperle). ■

KEMENNADENN

Evit un diskouezadeg e klasker skritelloù "DEFENSE DE CRACHER PAR TERRE ET DE PARLER BRETON". Skrivañ d'ar gazetenn (8, straed Hoche-35000-ROAZON).



Kazetenn divyezhek bugale CM2 gaoù Morand
Lannuon
Oberour: J.P. Scaon
Kerzu 1988

AR VUOC'H MIJ (niv. 1 - Kerzu 1988) a zo "kazetenn divyezhek bugale CM2 gaoù J. Morand - Lannuon", a lenner war ar golo. Ur gazetenn tevoc'h ha marc'hadmatoc'h eget Bremañ (28 pajenn, 5 lur), gant skeudennoù, tresadennoù, ha... brezhoneg, da reiñ kofadoù mezha da veur a gelaouenn a lavar bezañ "divyezhek". Mail warnon gwelout an eil niverenn, (ha penaos e vez laret CM2 e brezhoneg). ■

SKRAMM

SKRAMM (niv. 7, kerzu 88), kannadig c'hallek "ar sel led ha kleved e Breizh", embannet gant Skol Uhel ar Vro ha Daoulagad Breizh. Kemennadennoù a-leizh, tamm brezhoneg ebet avat.

Deskiñ a reer traou war bed ar kingozh ha skinwel, evel da skouer savidigezh ur "bodad arbennigourien europat a-zivout ar yezhoù bihanaet er kingozh, skinwel..." hag all? gant Bernez Rouz, kazetenn RBO (rbi) evit Breizh; anvidigezh ur rener nevez e Radio France Kemper ha krouidigezh ur bladenn gant ar zourien a-bep seurt (E.V., VF Kemener, h.a.) da geñver 150vet bloavezh Barzhaz Breizh, ouzhpenn hini ur film war ar memes danvez, gant Mikael Treger ha Donatien Laurent evit FR3.

Pouezusoc'h zo moarvat: sinadur un emglev etre FR3 hag ar "Fédération Française de golf", FR3 Breizh o vont da fill-mañ ar c'henniferivadegoù da zont. Gouzout a reomp bremañ pelec'h mont da vanifestiñ. Ur pennad a bouez zo ivez diwar-benn implij ar MINITEL e Breizh. M.K.

KELEIER AR VRO (miz Du 88, niv. 3) a zo kannadig "Emglev Bro ar Oriant", distar lec'h ar brezhoneg ennañ avat, daoust ma pouez an emglev war an divyezhegezh. Deskiñ a reomp e-barzh embannadur "An Dasonn", (trimiieg divyezhek a vro Mened"), a-hervez. Ne roer ket ar chomlec'h a garfemp gwelout ur wech bennak, met Emglev Bro ar Oriant 1 hent-dall F.A1 Leve - 56100 - An Oriant-

SKRIVIT E-BARZH BREMAN! Evit niverenn miz Mae, kasit ho pennadoù, keleier, kemennadennoù, luc'hskreioù a-raok al Lun 6 - 02 - 89 da: BREMAN 8, straed Hoche - 35000 Roazon

bremañ 14

KEMENNADENNOU

UN DIELL DIBARI!
«KAN II», KAN AR BOBL 88 EN UR GASETENN



KAN AR BOBL DUOD 1988

KAN AR BOBL 1987 a voe kenaozet e Duod, e-kichen Kallig, gant RADIO KREIZ BREIZH (99,2 Mhz) ha Kelc'h Kel-tiek Rostren. Muioc'h evit ur bazenn war du konkour meur an Oriant e felle d'an aozerien sevel un darvoud a-bouez evit ar c'han, ar sonerezh hag an hengoun dre gomz er broioù Plin ha Fisel. Hag ar pal a voe tizhet. Ret mat neuze mirout memor ar goule dre ur gasetenn a voe embannet e miz Here 1987 (KAN 1).

Kement a verzh a voe graet gant Kan ar Bobl Duod e 1988. Tamm ha tamm e teu Duod da vezañ un emgav ret evit an holl re a vourr o klevout kanaouennoù ha sonerezh, hengounel ha bev, kreiz Breizh. Dont a ra KAN II da ginnig un heuliad d'ar goule-mañ dre ginnig ar peb gwellañ anezhañ.

An darn vrasañ eus ar garterien hag ar sonerien a vez kavet e-barzh n'o doa bet biskoazh an tu da vezañ enrollet e-barzh ur gasetenn pe ur bladenn. Gant se ez eus eus KAN II un diell dibar war dachenn an dastum hag ar brudañ evit pezh a sell pinvidigezh hengounel Breizh. Div wech hiroc'h eo KAN II. Kavet e vez KAN II (skeudennaouet gant un daolennet bet livet gant Fanch Vidamant) da brenañ er stalioù pladennoù ar re wellañ, hag en ur rouedad a hantek bennak a lec'hioù gwerzh e bourc'hioù ha keriou Kreiz Breizh. Pe skrivañ da: Radio Kreiz Breizh, Sant Nigouden - 22160 Kallig - Kas 75 lur + 5 lur a vizoù an tamm). Pellg. 96-45.75.75. ■

bremañ 15

"KANENNOU Sante"

Embannet eo bet e 1988 gant "An Tour-Tan" un dastumad "Kantikou Brezhonek", liasskrivet gant an tonioù, tennet an darn-vuiañ anezho, eus ar rollad hengounel implijet en eskoptioù Breizh.

Oc'h embann bremañ "Kanennou Sante", en deus fellet d'an aozer klokaat ar rollad-se ha kinnig d'ar vrezhonegerien un dastumad nevez, tennet an darnvez anezhañ eus ar Salmoù. N'eo ket un droidigezh nevez, met kanennoù savet unan diwar pep salm, 150 en holl, aes da ganañ war an tonioù kozh anavezet hag embannet e "Kantikou Brezhonek" pe tennet eus Barzhaz Breizh. Savet int bet dreist-holl evit harpañ ar gris-tention a glask ober en o buhez penderizek gant yezh o bro hag o zadoù, hag evit nevezañ un tamm bennak, gant doujañs ouzh ar Skritur Sakr, ar c'hanennoù a blij dezho implijout en o bodadegoù ha lidaegoù hag ivez bendez en o ziezeghioù. ■

Kanennoù Sante - An Tour Tan (levr 15x21) 160 pajenn - 75 lur. Skrivañ "Lein ar Roc'h" Kergrist-Moelou, 22110 ROSTREN-

KONTADENNOU AR BOBL gant Fanch An Uhel (Al Liamm, 224 pajenn, 98 lur). Nevez embannet eo trede levrenn an dastumad, a zlee bezañ an hini diwezhañ. Met unan all a vo c'hoazh...

An holl o devo fent gant "Kure Brelevenez" a oa bet treset gwechall gant Tudal Huon hag embannet gant YOD-KERC'H (war am eus klevet e chom c'hoazh skwerennoù eus al levr sakr-mañ).

Ar c'hontadennoù all a zo heñveloc'h ouzh ar pezh a c'hortozet digant marvailhoù-pobl, gant an Ankou, ramzed, roueed, ha prinsezed.

Da lenn unan hag unan bennoz a-raok mont da chouarañ ho tousel. ■

SEVEL UR SENARIO (BREZHONEK ?)

Goude Gouel Etrekeltiek ar Film a vo dalc'het e ROSKOD etre an 13 hag ar 17 a viz Meurzh e vo aozet ur staj sevel-senario evit ar vrezhonegerien.

E Treglonoù, eus an 28 d'an 31 a viz Meurzh e vo neuze ha kinniget eo ar staj d'an holl re a zo treet gant skrivañ e brezhoneg da gentañ penn. Pouezus e c'hell bezañ evit dazont hor yezh seurt dalc'hadou-studi, o vezañ na n'hellor ket sevel filmoù en hon yezh hep tud gouest da sevel senarioù.

Tud a-vicher a ray war dro ar staj a vo gweladennet gant tud all o deus savet filmoù. Labourer e vo war skridoù degaset gant ar berzhidi. ■

FEST NOZ TREUZMISKET

D'ar Sadorn 4 a viz C'hwevrer 1989 e Brest, sal an Ti-Kêr, fest noz gant PEVAR hag ARPEGE MELBA. Kavet e vo krampouezh ha kouignoù da zebrin er sal. Deuit niverus ! ■

GOUEL BROADEL AR BREZHONEG

Gant al lizher-mañ e roomp gant al houout deoc'h e vo dalc'het trede gouel Broadel ar Brezhoneg e Karnez d'an 28 - 29 - 30 A VIZ EBREL 1989.

Kerkent ha bremañ eta e c'hellit miret an devezhoù-se hag o brudañ e-touez izili ho kevredigezh.

Diwezhatoc'hik e vo kaset keloù resisoc'h evit kement a sell ouzh ar standoù ha roll ar gouel. ■

Skrivañ da: **AL LIAMM**
16, straed des Fours à Chaux
35400 - SANT MALO -

Lennit al liamm

Koumanant bloaz 120 lur (studierien, tud labour: 100 lur)

En em vodet eo strolladoù breizhek Brest da c'houlenn digant ar maer, George Kerbrat (RPR), "reññ anvioù brezhonek...d'an dach staliadur sevenadurel (anvet) ar c'h-QUARTZ hag OCEANOPOLIS"

"Krediñ a reomp start e tle k'vrest dougen enor ouzh yezh ha sevenadur Breizh.

Dre, emañ Kuzul hon ti-ker o paouez mont a-du, gant ur mennad savet en div yezh, galle ha brezhoneg, o c'houlenn ul "lezenn-stur" (pe "statud") evit ar yezhoù ha kulturioù rannvro. Gant se, ne vefe ket komprenet n'en em lakfe ket k'vrest da implij evit he savadurioù sevenadurel ar pezh a c'houlenn ober ouzh ar Stad.

Daoust ha n'eo ket merket -e trede poent diwezhañ ar Mennad votet a-unvouezh- ma vefe posubl hiziviken implij ar "yezh-rannvro" e-barzh ar vuhez publik, dreist-holl evit an oberiantioù sevenadurel, an a-roueziañ, an "endro" ha kement ha ma c'heller, evit an darampredoù, gant implijerien ar Servijoù ?

E gwirionez, reññ un eil anv e brezhoneg kerkoulz d'ar c'h-QUARTZ (un anv a orin germaneg an hini eo), unan eus an anvioù-mañ : TI AR SEVENADUR, pe, KREIZENN SEVENADUREL.

Degas a reomp adarre da soñj hor goulennoù :

■ diouzh un tu : reññ d'ar c'h-QUARTZ (un anv a orin germaneg an hini eo), unan eus an anvioù-mañ : TI AR SEVENADUR, pe, KREIZENN SEVENADUREL.

■ diouzh un tu all : reññ da eil anv da OCEANOPOLIS (ur ger nevez savet diwar bruñhoù latin ha gregaj) : TI AR MOR, hag a zo un anv eun kenañ, aes-tre da gompren ha da zerc'hel soñj ennañ.

■ hag a-hend-all, tre poent hor goulennoù : implij da vat ar brezhoneg e salioù OCEANOPOLIS/TI AR MOR, war ar skritelloù o reññ anvioù ar pesked -ar bezhinennoù, ar bigi, ar binvioù hag an traoù a bep seurt hag a vo lakaet war-wel, -an anvioù brezhoneg o vezañ skrivet e-kichen an anvioù e galle, ha bep gwech ma vo tro e latin pe en o yezh orin.

Bez' e tleer, en ur Mirdi bras evel ma vo OCEANOPOLIS/TI AR MOR, reññ enor da var-tolodet ha da besketerien

Vreizh gant lakaat eno war-wel ar c'hantadoù a anvioù roet ganto e brezhoneg da gement tra o tennañ da vicher ha da vuhez ar mor...

... A-hend-all, e tegasomp deoc'h da soñj e oa lakaet gant hol lizher a viz Here rolloù un toullad Brestiz hag o doa sinet ur skritell lakaet war-wel e Foar ar Strolladoù. Hag e oa ivez gant se roll anvioù ouzhpenn pemp kant all a Vrestiz hag a Vrestadeged a-du gant hor goulennoù evit ma vefe implijet ar brezhoneg war ar panelloù da stagañ ouzh ar staliadurioù-ker, -evel ma oa kroget d'ober ar C'huzul-ker a oa e karg a-raok an hini n'emaoch'n en e benn".

Gant Armañs Keravel ha Yann Fanch Kermeiz eo sinet al lizher, en anv "Bregleo Breiz" ha "Kreizenn Brezhonegerien Brest". Setu ur skwer urav eus ar pezh a c'hall, hag a zlefe an holl strolladoù breizhek o-ber, ar parrezioù hag ar c'hêrioù, da vrezhonekaat an endro, da saremrediñ an dilennidi ha diskouez desho o yezh. N'haller ket gortoz hon folitikerien da labourat evit hon yezh na ne greder gouenn tra diganto.

GERIOU KROAZ MIG GENVER 1989

1									
2									
3									
4									
5									
6									
7									
8									
9									
10									

- A-LED**
 1- Dindan ar rusk end-eun
 2- Uzin
 3- Hañter - Euzh
 4- Divalc'h
 5- Evel ar c'hi ouzh e vestr - Eus bezañ
 6- Eyn-preizh - E-kichen Gasilia
 7- Ker a Vro-Flandrez - Notenn - Donezon
 8- Farsko melon - Dit-te
 9- Ti bleñchoù ha san
 10-Hepten - Etre Hoc'h an ha Logonec'h
- A-SERZH**
 I.- Pradenn srus
 II- Aracogen- ket e vez mont gant hini an douar
 III-Eal - Evel daoulagad an erer
 IV- Yezh c'hersanek
 V.- Notenn c'hresianek- Gourciziañ a ra - Hag-ar-gour
 VI- Gwizi
 VII-Eus gouzout - Mont war wel
 VIII-Kentañ derez - El lec'h-se
 IX- Eus bezañ - Kontañnet er c'hêrioù bras - Hag-ar-gour
 X.- Ker vrasañ ur vro getliek.

BREMAN NIVERENN 89

TAOLENN
MIG GENVER 1989

Lizhiri.....	2
DEUG.....	3
R.B.O.....	4
Keleier.....	5
Euskadi.....	6
Euskadi.....	7
S.A.B.....	8
S.A.B.....	9
Mab an Dig.....	10
Mab an Dig.....	11
Mab an Dig.....	12
Lizhiri (heul)...	12
Journal Ofisiel...	13
Kazetennoù.....	14
Kemennadennoù...	15
Akadianed.....	16
C'hoariva.....	17
Brezhoneg e Brest	18
GERIOU KROAZ.....	19
Taolenn.....	19
MESK-DIVESK.....	20

Pennadoù savet gant
 Paskal ar Marc'h eg, A.V.C., M.K., M.BR., Erwan Gargal, S.A.B. Mikael Madeg, Bernez Kadored, Paol ar Meur Mikael Konk, Mich, Philippe le Cordroch ha Garan ar Meur.

Maketenn savet gant
 Nolwenn Louarn, Lena Louarn, Annaig Lagadeg ha Jil killevere

Skoazell gant N.OLIER

Rener BREMAN M. BAUDU

Moulet e ti an OSCR. Tachenn Veurzh 35000

KOUMANANT BLOAZ 120L estren-vro : 150 lur Skoazell adalek 150L

Kasit ho chekenn da : vBREMAN 8 ru Hoche - 35000 ROAZON 35000 -

SKRIVIT E-BARZH BREMAN a-raok ar 5.2.89

bremañ 89

PAJENN AR VUGALE

G
W
I
R
P
e
G
A
O
U

HA BARREK OC'H WAR VUHEZ HO PRO ?


- Ganet e oa Jakez Karter ar morar brudet e Sant-Brieg.
- Marvet e oa Nevenoe er bloavezh 741.
- Eus aodoù ar C'Hanada e teu an eoged da zozviñ e stêrioù Breizh.
- Hervez ar vojenn e vez kustum al loened da gomz an nozvezh kent Nedeleg.
- Ganet e oa Jean-Loup Chretien beajour an egor e Landreger.
- Ijinet eo bet ar stetoskop (selaouenner-skevent) gant ur medisin breizhat.
- War aodoù Breizh emañ tour-tan uhelañ Europa.



C'hoariomp !

BAG + MOR TAN EON - GOR TOG

peseur talvoudegezh zo gant pep lizherenn ?



Peus ket fan ?

Digarezit ! Ne vutunan ket mui...



1- gaoù (Sant-Malo), 2- gaoù (e Brest), 3- gaoù (e Gwint), 4- gaoù (e Gwint), 5- gaoù (e Gwint), 6- gaoù (e Gwint), 7- gaoù (e Gwint), 8- gaoù (e Gwint), 9- gaoù (e Gwint), 10- gaoù (e Gwint).

bremañ 89


MESK-DIVESK

Brezel ar c'hig ha brezel an hormonoù. Azalek ar bloaz-mañ ne vo ket degeret er CEE kig al loened desavet en U.S.A. gant hormon. Nemet an tammoù implijet evit boued ar chas ha kizhier.

Perak emañ skoilhet ar Stadoù Unanet gant-se ? Abalamour da gudennoù al labourerien-douar er vro ? Nann, dre ma ne fell ket d'an embregerezhioù louzoù koll arc'hant. Ampoezo-niñ loened ha tud a zo gounidus meurbet, perak paouez ? ■

Al loened doñv a zo praktikoù hag a dalvez ar boan soursial outo : en 11 milion a diegezh a Frañs ez eus 35 milion a loened er gêr : 9,7 milion ki, 6,5 milion kazh, 8,5 milion pesk ha 1,5 milion baot pe naer. Un drederenn eus ar c'hig degaset eus an Amerik d'ar CEE a servij da fardañ boued dezho. O stalioù dezho nemetken o deus bremañ ar chas ivez : ur gourvarc'had 300 m² a zo bet digoret e Cesson (35) ha dizale e vo reoù all en Naoned ha Brest.

Met sur e vez diaes da loened'zo kargañ o c'hof bemdez-Doue, ha ret d'un darn mont da glask o zamm bara pe askorn er podoù-lastez dre ar straedoù pe maezioù. Peur un R.M.I. pe G.D. (Gorp Diazez) evit ar chas paourañ ? ■



Un nebeut bloavezhioù 'zo e veze E.D.F. gant he bruderezh "pep tra tredan" pe "tout électrique", ar pezh a zo un digarez da sevel er Frañs ar sotañ 'dioulañ program nukleel ar bed.

Re a dredan bremañ ; ret eo adkregiñ gant ar pub, met en un doare dirustoc'h, c'hwekoc'h ar wech-mañ : diskouezhet 'vez bugaligoù oc'h ober flourig d'o arzhig e-korn an tommerez.

Goude skrid mesk-divesk diwezhañ evit kenderc'hel gant ar gwirabegezh (G.ar Meur) :

Da geñver un abadenn vuzik gant ANGE e BREST e miz Here e oa bet kavet 70 g. kannabis gant tud eus Sant-BRIEG, bet prenet ganto e Pengilly e ti un den a save plantoù en e liorz. Emañ an tri den en toull e Brest abaoe. ■

Dirak ul lezvarn e Roazon, un tiegezh marokan, a zo tamallet dezho bezañ gwer-zhet war-dro 20 kg kannabis dindan daou vloaz : etre a 7 den (ur vamm-gozh en o zouez) ez eus bet ingalet 935 300 lur a dell-kastiz, ha 15 bloavezh toullbac'h. Evit ar prokolor n'eo ket tra-walc'h. ■

Dirak ul lezvarn e Roazon e miz Kerzu an afer-mañ : marv ur paotr yaouank eus Cesson e 1987 goude bezañ en em flemmet gant heroin. Ar bourchaserien danvez a zo bet barnet bezañ kiriek eus e varv ha kaset d'an toull (18 ha 10 vl.) Pennabeg ar marv (hervez O.F.) ne oa ket bet "puraet" ar brown sugar, ne oa ket a galite vat. ■

Dirak ul lezvarn e Pariz, tud eus Porniched a oa o labour lakaat ar c'hokañ degaset teuzet e-barzh boutailhoù gwîn Champagn da vezañ de-reatoc'h. Disc'h an abadenn : 50 vloaz toull etre 11 den. Serret o stal ganto evel-just ; tud dilabour ouzhpenn. ■

Egwengamp e miz Du, profoù raknedeleg da 17 Tregeriad tamallet dezho bezañ gwerzhet, butunet pe lonket un tamm H pe heroin : 23 bloavezh toull, 280 000 lur a dell-kastiz. ■

Plas d'an drafikerien alkoool evit Gouelioù Nedeleg ha Dibenn ar bloaz ■

Butuniñ pe gwerzhañ un tamm kannabis, en emgavout a reer en toull. Sevel ur greizenn, gwerzhañ un tamm tredan ha dreist-holl legadiñ danvezioù skinoberiant d'hon diskenidi, en em gavout a reer e-touez renerien E.D.F. ■

Souezhet a-walc'h e vezan gant berzh ar c'hestoù savet a bep eil evit sikour an enklask war ar c'hgrign-bev, pe ar pobloù marnaoniet, pe ar re baour, hag a bep seurt tud all. Gant an teleton diwezhañ zo bet dastumet 127 000 000 lur kaset gant 635 000 den.



Pedra 'zo da ziskrediñ diouzh pennrenerien an dastumerien ha rastellerien arc'hant, met ouzhpenn perak 'vez ken brokus an dud a vez ken alies o klemmichat abalamour d'ar c'hresk war ar prizioù, da bouez an tailhoù, da dregantad an TVA hag all...

Diouzh un tu 'vez roet arc'hant ken laouen, diouzh un tu all e vez dalc'het pizh d'e wenneien. Ret e vije tennañ kentel deus se : an tailhoù paeet a zlefe servij d'an enklask evit ar c'hgrign bev, hag all... Hag evit dispignoù bras ar Stad e vije savet koñkourioù rastellerezh arc'hant : ur miz evit an Deskadurezh, un all evit an Arme, ur prantad all evit ar Sevenadur, hag all... ■

Un tamm digresk war T.V.A. al louzoù, e miz Here, hag an apotikerien o vlejal raktal, betek mont da vanifestiñ divezh war-lerc'h ar glañv-diourezed. Koulskoude e vefe 300 000 lur ar bloaz gopr etre ar paour kaezh tud-se.

Ar grip oc'h ober e reuz e miz Du ha Kerzu, oc'h aloubiñ ar vro dindan pemzektez. Ha gwerzhet ur bern louzoù da heul-dinec'het an apotikerien evel-just, adleuniat o yilc'hier.-

Re vraw an degouezh, re sklaer an taol, diskoulm all e-bet : gant an apotikerien hag an embregerezhioù louzoù eo bet produet ha skignet virusoù nevez ar grip er bloaz-mañ ! ■